


KANTIK AR C'HLOC'H



WAR DON : *Elez euz ar Baradoz...*

Diskan : Kanit, kleier binniget, kanit euz lein ho tron,
 Ho mouez bepred dudiuz 'ra tridal ar galon.
 Bugale ha tud iaouank, tad, mamm, pinvik ha paour,
 Selaouit mouez ho kleier ; kaëroc'h eo' vid ann aour !

Kement tra gret gant Doue en deuz mouez da gana,
 Kana gloar ha karante krouer braz ar bed-ma :
 Mouez hon c'hleier binniget, eo ken kaër mouez a zo :
 Bemde e lar d'ar c'hristen : « Kar Doue ha da Vro ! »

Ar c'hloc'h a zo prezeger, prezeger gallouduz :
 Gwech e son nerzuz, laouen, gwech e klemm truezuz ;
 Ha peb zon zo sklerijenn evid ar sperejou,
 Joa, strafil pe spont frouezuz evid ar c'halonou.

Selaouit : ar c'hloc'h a zon ; petra lar ? — D'ann daoulin
 Stou, kristen, ann *Angelus* gant he vouez kel lirzin
 A brezeg d'id eur mister : Eil Ferson ann Drinded,
 Ganet gant Mari, Gwerc'hez, 'touez ann dud n'euz bevet.

D'ar zuliou ha d'ar goueliou, moueziou a zav enn er
Euz touriou dantelezet, steredennet ken kaër ;
Zevel a reont ive euz tour ar barrozik :
Ar c'hristen 'red d'ann Iliz, kerkoulz paour ha pinvik.

Ann Iliz eo Ti Doue, hi eo Ti ar bedenn ;
Enn Iliz Belek Jezuz, epad ann oferenn,
A zigemer oll veuiou kristenien ar barroz,
Mouez ar c'hleier binniget ho c'has d'ar baradoz.

Sellit ar meserik paour er prad pe el lannek :
P'en deuz klevet glaz ann noz, e lar e brezonnek :
« Pardonit, o ma Doue, pardonit d'ann anaon ; »
Ha, gae, warlerc'h he vandenn, e teu d'ar ger hep aon.

Pegen dous d'al labourer, gleb-dour gand ar c'houezenn,
Klevet ar c'hloc'h o laret : « Ehan, gra da bedenn !
Ar bedenn zo eul labour binniget enn Envou,
Evit pae, Doue a skuill gliz dru war ar parkou ! »

Levenez ar vamm gristen piou c'hellfe dizrevel,
Pa glev kloc'h ann Te Deum o kana d'he bugel ?
Dre he gan, ar c'hloc'h a lar : « Kaër-kaër eo he ine ! »
Hag ar Vamm enn he c'halon : « Elik koant da Zoue. »

Ann Tad-koz a drid, pa glev o kana d'he vleo gwenn
Ar c'hloc'h a gane gwechall, pa oa he vleo melenn !
Unani be ha kavel, tad-koz ha mab bihan ;
Na kaër 'ta eo mouez ar c'hloc'h, euz lein he dron pa gan !

Me wel eur zoudard iaouank, ganet e Breiz-Izel,
Duet gant poultrenn ann hent, brevet gant ar brezel,
Kollet en deuz he oll nerz, dale eo da zemplä,
Pa glev eur vouez dudiuz, mouez he gloc'h o kana !

He voad a zeu da domma ; redek 'ra he zaërou ;
He galon a lamm'n he greiz ; tec'het eo he boaniou....
Mouez kloc'h he gatekizou e deuz he gonfortet ;
Mouez ar c'hloc'h, zoudard breizad, ra da nerzo bepred !!

Dec'h, kloc'h ann Aotrou Doue a diute truezuz,
(Ar belek d'ar c'hlanvour paour a zouge he Jezuz,)
Hag hirie klemmuz e son ! eur c'hristen tremenet,
Dizoc'h he erv, d'ar bed-ma keno en deuz laret.

Kanet eo ar pedennou, ar c'horf 'zo er verred,
Daërou dik 'gouez d'ann douar, kalonou 'zo mantret ;
Keno, tad, keno, mamm ger ; keno, breur, keno, c'hoar !!
« Keno, 'lar ar c'hloc'h ive, keno, keno er gloar !! »

Mouez-kanvou ar c'hloc'h eo mouez eunn tad, eur vamm maro,
A lar d'ar bugel prodig : « Ann env eo da wir vro ;
Dilez 'ta da dechou fall, lak urz vad 'n ez ine ! »
Hag ar paour kez reuzeudik a dro war zu Doue.

Pa zigouez reuziou er vro : dic'hlagu, brezel, tan-gwall,
Kloc'h ann Iliz 'vo klevet o tintall, o tintall ;
He vouez klemmuz a laro : « Zikour, zikour, timad ! »
Kerkent o stourm vo gwelet merc'h ha mamm, mab ha tad.

Gwasoc'h reuziou, ziouaz d'imp, zo zavet war ar bed :
Oll vugale Lusifer a zo dichadennet ;
Mouez ar c'hleier binniget a vo da bep kristen
Ar barr-avel a skubo ann drouk, ar falz-kreden.

Kanit, kleier binniget, kanit, kanit huel !
Ha c'houi oll, bugale Breiz, selaouit ho c'hentel ;
Ho c'hentel vo eunn douzder evid ho kalonou,
Mar he c'heuliet, c'houi ho po kurunen enn envou !!

*Ann Otro nn'Eskop a ro daou-ugent devez a induljanz da
gement hini a gano enn he Eskopti ar c'hentel gant
doujanz Doue.*

Sant-Briek, ar seiz a viz Gouere 1887.

A. DUBOURG, *Vikel-Vraz.*